

J.M. 10

Divar benn ar glao.

— 1 —

Nevez zo divarben ar glao
Em boa lennet eun histor vao,
En histor hag a raio vad
D'an dud a glem ouz Doue salmad.

— 2 —

Eun deiz bennag eur marc hadou
Oleiz ganta a bechou aour,
Enem gavar eun tammik divezad
Da zont d'ar gear ouz ar marc had.

— 3 —

Cetu deuet eur barrad glao
Preza didanna ne voa quet brao,
Dillad ar paour keaz marc hadour
Dizab a zo eat gleb dour.

— 4 —

Dre ma tigouez an amzer
E mad d'an den en diguemer,
Mes ar beachou er c'houlz trol
A enep Doue a c'hrao mol.

— 5 —

Ma vijen bet Doue emezhan
 Ne rajen ket a x'laoc'hlaoc'h ~~h~~ broma,
 Tec'hed eo bez a didruer
 Ouz an dud keiz a zo er miz.

— 6 —

Epad ma kendalc'h evelze
 Da damal an Doutron Doue,
 En eur lavaret oa didruer
 E kichen eur c'hoat e tigouez.

— 7 —

Eman o vont ebarz disoursi kaer
 Da silam ac'hano eul laër,
 Eul laër ganthan ur fusul garguet
 Ha prest da ober an torfed.

— 8 —

Da vel eo bizet an ten
 Or marc'hadour a soubl e ben,
 Or paourkeiz den a gav dezhan
 Ema siouez echu ganthan.

———— 9 ————

Ne ket, Doue en e vadelez
 A asten dezhan he vuez,
 Ar poult zo glejiet eun tammik
 Hag ar fusul ne lavar grik.

———— 10 ————

Ar beachour er savete
 A lavar dioc'h bennoz Doue,
 Pennoz d'ar glao a zo kuezet
 Anez ar glao oan bet lazet.

———— 11 ————

Antronoz vintin pa savaz
 D'he bugale e lavaras,
 Neulit Doue va bugale guer
 Dre m'oa dea' h fall an amzer

———— 12 ————

Ener neuze gounita dezho
 Pa bet testik d'ar maro,
 Anez ar glao emezhan
 E fiaon d'ho tad vee' h bel brema.

— 13 —

Nag a dud siouaz a zo,
 Da vez an amzer divalo.
 A vez klevet eo he enem glem ouz Doue,
 Na diskiant eo an dud. ze.

— 14 —

Lezomm Doue da renn ar bed,
 Erwez e volonterz bepred,
 Paac ni hor spered a zo-gual vez,
 Da zeski Drezhan he archer.

— 15 —

Neuz fors pe seurt amzer a ve
 Eur quir gristen a veul Doue,
 Drezhan el lavar o va zad
 E'hui glask bepred va brassa mad.

— 16 —

Dre ar zec'hor an dourciër,
 Ar ienien, an domder,
 Pa vo gant an oll bepred
 Meulet hoc'h Kano benniget.

Fr. Calvez Seur. Pourq. Blanc